

# GWERZ.

**Eur bugel so bet merzeriet à mouguet  
gant he lestad Youen Yvinec**

---

Tad, mab, a Speret santel, tri ferson an Drindet,  
A c'hui mam garantezus, so en Yv curunet,  
Roit din ho sclerijen un neubeut amzer,  
Vit ma c'hellin discleria dre oll e Finister.

Choant a meus da ziscleria dirag ar gristeinien,  
Ar verzerenti so bet gret da Varle Jaouen,  
Demeus a beurs he lestad, Youen an Yvinec  
Ebarts e canton Pleyben, bars e pares Gouëzec.

Gant un intaves e oa Yvinec eut eujet.  
Eur botrez eus he goas all gantai oa bet chomet,  
Corf ar bugel, er bed-ma, so bet merzeriet  
Ag he c'hene gant Jezuz en Pâlez an Drindet.

Deus ar beurs he zad devoa, ur tamik peadra,  
Sufis evit e guiska ag evit he maga,  
Gleje ket beza tretet goasoc'h vit al louënet,  
Goulsgoude eo bet, sioas, raog mont divar ar bed.

Seleouit coz a yaouank gant g'ar intantion,  
Me gred e vezo touchet, ko ils i me, ho calon,  
O clevet recita scler ebars en ier gomzo,  
A visch so gret dezhi o clez' he maro.

Goude ma so bet, s'oas, eur gouan rust meurbet.  
Cals a dud neur gwele mad vije kazi frimet.  
Mari Jaouen a vije neur gwele e kousket.  
El leac'h ma coueze an erc'h, an avel, scorn kalet.

Allas manket an doenn sur a us de gwele,  
Goude pa vije zavet neuze eus ar heure.  
Ne devoa ket a zillat da c'hold e c'hroc'hen,  
N'ag anter vouët da zibri, ha trista pinijen.

Taolet e vije Marie, ive ebars an dour.  
Doue ar guir Brovidans breste dei he zikour,  
Ag he buez astenne dre ze var an douar,  
Da c'hortos ma teui an heur d'i da bignad d'ar gloar.

D'an traon demeus ar solier o bet ive taolet,  
Dre ar sujet eus he lam, he fein oa ofanset,  
Sonjal dont da rei dezhi, velse taol ar maro,  
Pa deue ket da verval dre ner, ar souf raliso.

O ! demeus unek vloa oa ar bugel oajet  
Ag evel unan pemp bloa hi oa c'hoas da velet,  
Dre ma ranke soufr kement ets ar verzerenti,  
Oa forset da vez faëbl, da dremen eb kreski.

Jouen devoa promese, allas gant he vates  
Evit derc'hel nos a deiz d'ober fallagries,  
Gret o devoa eur c'homplot vit gallout dont a ben  
Da lakañ fin er vuez zougue Marie Jaouen.

He vates gant Yvinec a oa bet ofanset,  
Ah ti un neubeut amzer devoa ieûze kuitet,

Evel ma nem gava ac'h e teuas adare  
Gant kals a joa d'ati ze, vit ober fallente.  
Gwel dies eo resist enep an dud kruel.  
Pa oa ket, e neur g'ieza, bet lac'het ar bugel  
Eur feson all, cristenien, goude oa kemeret,  
Vit rei deshi ar maro a mont divar ar bed.  
An Yvinec un nosvez neus d'he vreg lavaret :  
Et buan breman Marie n'ho kwele da gousket,  
Ne deuet ket da zevet, ken a pezo klevet  
Tud an ti all pilet laun ; intendit m'ar keret.  
En nos se oa ar barb'ur bars er c'hrignal savet  
Evit mouga he lesvez h, creis entre lionz'hol'het,  
Un dorn laket var he tri, un all var he guinou,  
Vit e ampech da grial, na da ober klemou.  
Var estomac ar buguel oa neuze daoulinet ;  
Ha pa dije mil buez eno vije marvet,  
Entre griffou he lestat, muntrer bras a cruel,  
So da lezenou Doue, nos a deiz infidel.  
Me o ped oll cristenien deut da gonsideri  
Penaos e so tud karget eus a intrateri,  
Comprenit bars er soufrans neus bet Marie Jaouen  
Araog renta he c'hene d'or Salver Souveren.  
Nod ket penaos, va Doue c'hel an douar souten  
Un den ken malisius, un den ken inhumen,  
El leac'h beza digoret eno er moment se,  
Ma tiskenje en infern buan corf ag ene.  
Ar vates a vouez huel, neuze eus ar beure,  
Deu da grial ar baotre zout euse couele,  
Marie vian sao buan, breman da dijuni,  
Vel pa vije ignorant de neus a neventi.  
Ar bugel oa interet garenor a respet ;  
Un neubeut deiou eo fet kuzet brao an torfet,  
Ha deut oar d'hen dizolo, dre brovidans Doue,  
Marie Prat so astenet, reze dei he bue.  
Youn Yvinec nevoa laket ferm ne speret,  
Nem disober eus a dud gleje carout parfet,  
Ma vije chomet kuzet, an torfed bars er vro  
He vreg entre he zaouarn dije bet ar maro.  
En deiz kenta vis ebrel oa ar c'hrim cometet,  
Pa eo bed disoloet gan an oll baldet,  
Yvinec a Jeann Brenner, coupabl eus ar suplis  
So bet kaset d'ar prison paseet e cour-d'assis.  
Ebars e fin mis gwere so bet selaouet  
Pevarzec test e Quimp'r, var sujet an torfet  
Jeann Brenner, so bet roet dezhi he liberte  
A Youen an Yvinec, barnet pad he vue,  
D'ober labouriou forsc en touez ar vuntrerien,  
Vit comans bars er bel man d'ober he binijen,  
Breman e teu da sonjal n'he amzer dremenet,  
Bars ar vuez dizordren, p'hini neus bet heuillet.  
Abaoue he vugaleach betek he dregont vloa,  
Siouas neus bet condiet eur vuez ar falla.  
Daoust d'he oll fallente, goullomp oll a galon,  
Ma royo Doue dezhar, couls a dem, ar pardon.

# GWERZ YVON TERREC

*En em grouget e prison Quimper, ar 6 a vis Eost 1891,  
gant aon rag he j'jamant.*

Me o ped a wir galon, Roue holl buissant,  
Da bresta din ho speret, ebars en heur bresant,  
Vit ma c'hellin recita ebars e ber gomzou,  
Cals demeus a laeronsi, a demeus a grimou.

Mar roit din ho speret teuin da ziscleria,  
Ar vuez trist deus heuillet Terrec bars er bed-ma,  
Ar chosa tud so breman, o ren ebars ar bed,  
N'eus ket klevet kement all, aboue ma in ganet.

Va goad a deu da frima pa deuan da gompreñ,  
Va speret a so troublet, va c'halon en anken,  
Sonjal en defe un den so ganet eur vam ganet,  
Conduet eur seurt buez, selaouit Bretonet :

Terrec a deus bet heuillet hent ar fallagries,  
Ag aboue ma oa buguel nem laket da laeres,  
N'eus ket heuillet sioas hent an dud badezet;  
Heuillet en neus pen da ben hent ar gwir payanet.

Da oad demeus a seis vloas oa e nem laket laer,  
Betek nao bloas var-n'ugent, neus dalc'het he vicher.  
Bet nevoa araog breman diou gondaonation :  
Goud a re var pe seurt tu, digor dor ar prison.

D'an oad euz a c'houezek vicas, en ti oa bet mevel  
Ou men laket da forzi daez, neus d'ou arbel,  
A kaset neuze ganthan eur som bras a arc'hant,  
Vit ober faos dispignou vit eva gwin-ardant.

Betek bars e Sant-Malo, Terlec neus bet laeret,  
Evel ma kave an tu vije atac presset,  
Lakat he zorn malevru ebars e pep kartier,  
Var beadra he neza, ia sur e ber amzer.

Dillat, evach ag arc'hant vije gaethan laeret,  
Pa neur gave en un ti ne vije ket genet,  
Evit goulen da eva ag ive da zebri,  
Ar pez vije d'he ide, hervez le fantasi.

An dud a roe dez-han, ar pez a c'houenne,  
Gant aon entre he zaouarn d'ont da goll ho bue.  
An holl ebars ar c'hortre, pa velet anezhan,  
Gomanse ho yzili, var an heur da grena.

Ouspen an oll laeronsi a neus bet cometet,  
Terrec 'o gant kais a dud bec'ive akuset,  
Deus beza laket an tan, a deus beza lac'het  
Mes e c'hober ar c'hrimou ne oa ket bet gwelet.

Ebars an daou varnugent demeus a vis kerzu,  
E so bet rentet un ti e poultrig e ludu,  
E Kervagor, e Tregunc, so va dro seis kart leo,  
Comprenit mad cristenien, de neus a Concarneau.

Var dro eis heur euz an nos, ja bet kroget an tan,  
Pevr den so bet devet, ebars e kreis ar flam,  
Oll tel an ti nemet un, oa et da Concarneau,  
He vuez neus preservet dre zeus ar flamo.

Heman so paralizet, neis ket un ezel mad. | tad  
Chomet breman er bed-man, neus na breur, mam, na  
Eur groas pouner neu sioas, Rene Bris da zougen  
He chans a so dinatur, kaled he blaneden.

Na pebeus ta calonat, oa bet dan den' kes man,  
Pa oa neur gavet er gear pa ne vele netra,  
Nemet moguerriou an ti, he dud ne vele ket,  
Vele met ho relegou, a choas a voant rostet.

Nep a nevoa ar galon d'ober eur sort torfet,  
E beo entre peva march, gleje bea laket,  
A goude devet en tan, vit scoer e Breiz-izel,  
Ag a ludu dionthan gouentet gant an avel.

En deiz araog an tan gwal Terrec oa hep arc'hant,  
En deiou varlerc'h newa hervez e santiment,  
Ze a roe da gredi d'an oll bars er c'hontre  
E oa bet an torfetour eus ar c'hrimou bras-se.

Rag ebars e Kervagor e oa aour ag arc'hant,  
Pa oa finiset an tan, oa foullet prontamant,  
Kavet oa neubeut moni spilliou a boutonou,  
An aour ag an arc'hant oa partiet en n'ho zro,  
Entro pad peder zizun eo bed an archerien,  
E klask arreti Terrec, dre an oll amzer ien,  
C'hoas ne devoa ket gallet donet d'en arreti,  
Paysanted deus bet gret dre zikour kre eur c'hi.

Dont a re da venerzi an dud deus ho buez  
Mes ranket he neus pleg enep volontez.

A da brison Concarneau a neuze conduit.

Ac'hane oa conduit da Glimper d'ar prison ,  
Vit gortos beza barnet, la gondaonation;  
A pemp a pevar-ugent s galvet a destou,  
Evit beza zelaouet, var jet ar chrimou.

D'ar pevar d'eus a vis eot commansas he affer,  
A continuet d'ar pemp, nem gave d'ar merc'hher,  
En deiz varlerc'h vel ma ba digor dor he brison,  
Neur gavas tud estonet a l'eo ket ep rezon.

Yvon Terrec en devoa a rag he jujamant.  
Aoùn nevoa da receo, su he gwel chatimant,  
Ne chomas ket da c'hortos fin eus ar c'hour d'assis,  
Rentet dezhan ec'h ana evelen ar justis :

He zillad neus bet tennet bars en ber amzer,  
A gant boulouzen he do classon he voutou ler.  
Neus ereet he zillad, pa alic pikez  
Evit dont da nem groug dre tierz an droug

He zillad eus ar prison eus bet taolet er me  
Laket an-he da veza d'h gorf paour contre-jœ  
En noas evel eur bugue pa deu var an douar  
Neus finiset he vñe kre ep laket mar.

EUN TROC'HER MOG